



DISTRUJ LAGOUBRAN !

*Eur bouldrierenn hag eur ger oll strinket enn ær e kichen TOULON,
d'ar 5 a vis Meurz 1899.*

71 den maro. — 150 den blesset.

AR BOULDRIERENN

Petra zeuffomp-ni da veza
Dre ann amzer a ren brema,
Pa na giever ken mui siouaz !
Nemet komz a voall-heuriou braz !

Divez ar c'hrimou heb niver
C'hoarvez bem-lez dre ar c'hater,
Ann dour, ann tan a ra ivez
Kalz distruj e mesk ann dud kez !

Dec'h, ebarz e mor braz Goayenn
Oa beuzet hor pesketourienn,
Hag c'hirio, kerik Lagoubran
Zo strinket enn ær gant ann tan !

Enno gant hast e oa klozet
Poultr evit ar vartolodet
Pe oa ann traou koumans tomma
Etre Bro-Zaoz hag ar vro-ma.

Pemp kant mil lur boultr pe voardro
E oa bet digasset enno
Evit digemer ar Zaozon
E oa o klask affer ouzomp.

Mez allaz, pebeuz planedenn !
Ar poultr destumet d'hon diffenn
Deuz great siouaz enn eunn nosvez
Eunn distruj horrubl enn hon touez !

ANN EXPLOZION pe ANN TENN

D'ar zul vintin, pemp a viz Meurz,
Voar dro diveur, pebeuz boulverz !
Eunn draskadenn spountuz eston
A zihunaz oll dud Toulon !

Ar c'hren douar, ann diblaz ær,
Horjellaz kement ann tier,
Ken gouezaz ho chiminellou
Enn eur strakal voar ar ruiou !

Guer ar prenesti a strinkaz,
Hag ann doriou a n'em zraillaz ;
Meur a hini en doa sonjet
E oa deut ar fin euz ar bed !

Ann dud lamme euz ho gueliou,
Spountet, voar gorf ho rochedou,
O klask doriou hag prenesti
'Vit lammet er mez euz ho zi !

Neuze velont euc'h Lagoubran
Ann oab ruziet evel ann tan,
Hag ker vraz Toulon oll beuzet
Enn eur vogedenn boultr devet.

Ann dud a gomprenaz neuze
Pe seurt goall-heur a c'hoarveze ;
Strinket oa ar bouldrierenn,
Lazet ar re oa 'n'he c'hichenn !

Redek a reont oll ractal
Dre greiz ann noz du hag tenval,
Da gaz sikour d'ar re vlesset
Hag da zestum ar re lazet !

EUR VRO OLL DISTRUJET

Mez siouaz ! ne zonzont ket c'hoaz
Oa c'hoarvet eur goall-heur ken braz
Nemet pa veljont ann henchou
Goloet a hep seurt atrejou !

Ar bouldrierenn o c'hrevi
En doa strinket oll diganthi
Mein ar mogeriou hag kement
Tra a n'em gavaz voar he c'hent !

Ann tier pilet, dizahet ;
Ar guez draillet hag displantet ;
Ar spount, ann distruj, ar maro
Skignet siouaz ! pell tro voar dro !

Ar re genta a zigouezaz
E ker Lagoubran, ne gavaz
Met bernou mein hag atrejou,
Euz pere a zave klemmou !

Klemmou truezuz da glevet !
Klemmou ann dud anter lazet !
Rohadennou tud o vervel,
Heb gallout siouaz ! ho zével !

AR ZIKOUR

Gouskoude ann oll a labour
Digant kourach 'vit ho zikour ;
Mez kreiz ann noz heb sklerijenn
Ne velont ket eur veradenn.

Red oa dezho ellum torchou
Hag labourat a dammigon,
Gant aon siouaz ! da zizaha
Traou voar ann dud d'ho feur-laza !

Dizolei a c'heller neuze
Kalz anezho, hag heb dale
Oa digasset 'spen nao-ugent
'Nhe liseriou da vord ann hent !

AR RE VARO

Ouspenn tri-ugent anezho
Ne oant nemet korfou maro,
'N'eur stad ken horrubl da velet,
Ken frim ar goad er goaziet !

Darn e oa chomet ho mempro
Dindan ar vein hag ar zoliou !
Darn-all draillet, kasset da ioud,
N'eller mui ho anavezout !

Daou bried koz zo bet kavet
Enn ho guele evel kousket ;
Hogen pa zaver al liser
E oant troc'het dre ann anter !

'N'he zao eur verc'hik bevar bloaz
A zell enn dro dezbi siouaz
'Vel pa nije bet drouk ebet
Hag he feultrink kez flastret !

Eur vamm, o pebeuz kalonnad !
Goloet a zouar hag a voad,
A zelc'haz korf he bugelik
Tre he divrec'h hi maro mik !

Pelloc'h oa eunn all o vouela
Kichen he mabik trizek vloa,
Rannet he c'halon enn he c'hreiz
Gant ar glac'har hag ann enkreiz !

AR RE VLESSET

Deomp da vell ar vilisinat
O louzaoui ar re vlesset
Pere siouaz e oa ive
Euzuz hag spountuz ho doare !

Maint enno e renkennadou
Anter zizolo ho c'horfou,
Draillet, flastret ho izili
Hag gant ann dersienn o tevi !

Ouspen, o tra meurbet poanniuz !
Dre ho c'hlemmou meurbet skrijuz,
Kalz anezho ne c'heannenn
O c'houlenn voar lec'h ho c'herenn !

Lod ho breudeur, ho c'hoarezet ;
Lod ho bugale, ho fried,
Pere oa kousket n'ho c'hichenn
Pa strinkaz ar bouldrierenn !

Red e oa guella ma c'heller
Ho c'honsoli digant gevier
Rag eunn darn vraz euz ho zud kez
Ne oant mui siouaz he buez !

ENN HOSPITALIOU

Korfou maro hag tud vlesset
Zo bet heb dale digasset
Da Doulon, d'ann hospitaliou
Gant kiri ann ambulanson.

Laket oa ar c'horfou maro
Ent eur zall stignet e kanvo
Evit gortoz ken ma vijenn
Anavezet gant ho c'herenn.

Tre ma vijenn anavezet
Ar re varo vije laket
Ebarz cherchou gant ho c'hano
Hebken skrivet voar ar goulo.

ANN INTERRAMMANT

Ben ar meurzh, daou zevez goude,
Oll dud Toulon a n'em gave
N'em assamklet evit renta
Dezho ann enor diveza.

Ann Eskop gant kalz Beleienn
A lavaraz ann offerenn
Hag a vennigaz ar c'horfou
Losket er mez, toul ann doriou

Ministr ar Marin euz Paris
A zeuz ive d'ann offiz,
Senatourien hag deputed
C'heulliaz ar c'horfou d'ar vered.

KOLAÏK, P

(Tous droits réservés.)



Et memez ti a gaver va zoniou all : SON ar Meliner yaouank hag Klemmou ar Bennerez, SON NEVEZ ann Den yaouank d'he Vestre.
hag ar quir Garantez, GUERZ Tan-goall Paris, GUERZ Vacher hag GUERZ Malavoi, etc.

KOLAÏK P.